

ABREGÉ

Deus ar

VARN GENERAL

PE AR JUGEAMANT DIVEZA

Var an Ton : Separation an ine deus ar c'horf, pe eun ær sermon

SALUD dec'h hunblamant a ran, auditoret,
Iscus a c'houlennan pa nom den studiet,
Da rei dec'h eur boquet a deu demeus ar gloar,
Eun abrege tennet deus ar Varn General.

Ar sin demeus ar groas eun de apparisso,
Pa zeui er fin ar bed Jesus on guir Otro,
Evit fouilla ar guer deus a Jérusalem,
Men fel din lavaret on ineo eb quen.

Compagnunes santel vertuus a meulabl,
Glac'har so em c'halon o tonnet d'o quitat,
Pa zeuan da sonjal en o fidelite,
O c'heus bed d'on seleo en duran an tri de.

Men voar n'en de quet bed eloquant om c'homso,
Evel ma ve gleet da declami verrio,
En eur compagnones santel a vertuus :
Evit an actoret me a c'houlenn iscus,

Groed on eus on possubl a laquat on oll boan
Da essa contanti sperejo peb unan
Men garge e mije sperejou Ales
Da gontanti peb unan herve e volentes.

Men voar assistantet, noc'h quet c'hoas contant
En fin peb tragedie voar custum da gaet
Eur boquet spirituel memeus aon so em c'halon
N'em don me incapabl a ze en hep foeson.

Tennet e meus dar sort gant ar re savanta :
Allas ! hac eo digoeet gant an ignoranta,
Re se, compagnones, mar deu din bean troublet,
Næ vo quet dre ma faut, rac se mo iscuset

Ne non quet cals a dra nac ive studiet
Da barlant eur mister vel zo din digoeet :
Nermerdoc'h ma Doue, ennoc'h e meus fians,
Ebars en o c'hano me a ya da gommans.

Speret sacr a santel, prosternet dan daoulin,
M'o peb da rei o cras d'o servijer indign,
Da dont da rapporti ar pes so guirione :
A ze omp assuret, gulet vezo eun de.

Cheffo deus an illis, da Zoue ministret,
A gant ar re pere ar gouvernamant so roet.
A quement a observ lezen ar guir Doue,
Tud dimet, tud yaouauq, ac ive bugale.

Bugale e zomp oll da Grouer ar bed-ma,
Deus ar ligne Adam hac e bried Eva,
Hep respecti hini na nep sort qualite,
Ol e credan e zomp mempro da eun Doue.

Men den da bresanti dec'h ol evit boquet,
Mab an Tad eternal ebars en fin ar bed,
O tisquen eus an env ac e groas dirazan.
Da varn ac'hanomp ol ar veach divezan.

Mab Doue pehini so deut voar ar bed-man,
Incarnet er Voerc hes, dre c'hras ar Speret-Glan,
A seui certain eun de da varn en general,
Quement den so er bed, dre eur selans final.

Deut d'en em gonsideri ac e n'em arretet,
Rac red vo dimp bean net demeus a bec'h et
Pe na entrefont en env certainamant ;
Rac se, me o supli bevomp honestamant.

Chetu aman ar sujet demeus ma entrepris ;
Compagnones santel, bezet oll attantif.
Moyen gant grac Doue, me laro pen da ben
Ar signo bras a vezo quent evit fin ar Varn.

Ma ve nin a sonjfe ebars en on c'halon,
E lequefemp on foan d'ober reflexion,
Nin defe pa guitat o gren on pec'hejo
A da ober pinijen dimeus on ol fotcho.

Pa sonjan em speret dan devoes ternbl-se,
E renquan apparissa dirac ar Vajeste
Deus a Varner ar bed da rentan cont dean,
Vel ma lavar ar Prophet, gant eston e crenan,

Ar sent ar re vrassan memeus ar Vartiret
En o brassan poanio voant mui tourmantet,
Crenan ra o c'halon o tonet da sonjal
En devoes terrubl-se deus ar Varn-General.

Pa eo gant cals a boan ar re justan salvet,
E me ar Pap Innoçant, petra a vezo gret
En treomp pec'herrien, en durant on bue
On eus ni tremenet o c'hoansi Doue.

Breman me laro dec'h, vel m'e prophetiset,
Ar signo a apparisso quen evit fin ar bed,
Me o ped d'o seleo gant humilite a silans :
Me a ya d'o expliqua ebars en o presans.

An Antechrist a deui ebars en fin ar bed,
Eur mab da Lucifer partout evit presec,
Presec rei eul lezen coutrel d'ar guir Doue :
An neb nen credo quet a golo e vue.

Inventi a rei poannio evit dont da spontan
Ar re na deuiont quet da distrei gantan :
Sivoas ! cals adud, gant spont deus e clevet,
A credo d'e lezen a vezo ol coliet.

Ar prophet Elias, mignon bras da Doue,
A deuio da buezec e enep d'e volonte
Da gonjuri ar bobl da derc'hel mat dar fe
A da soufr ar maro quent renons da Zoue,

Bresel ac ar guernes ac ive ar vocen,
Assembles a vezo an teir goalen o ren ;
Ar guernes a vezo quen terrubl er vro-man,
Quen a zeui gant lamine an dud da disec'han.

Ar goad em goasio e deu d'en em lassa
Pa deuan da sonjal en debes terrubl-ma
Rac cals demeus an dud neuse e soueto
Gant an trubuillio bras e ve fin d'o deio.

Quement vo en disurs, betec al loennet mut,
Gant meejo glac'harus e epouvanto tut
Ac o laquaï ane da donet da sponta
Beteç memeusamant an inia hardia,

An eol gant nec'hamant a vezo eclipsset,
Epouvantus dan ol e vezo da voelet ;
Ac a loar a vezo quen ru evel ar goat :
Hannes a vezo eun amzer a vo considérabl,

Ar steret a goeo demeus ar firmamant,
Ar mor en fulor, gant eun drous epouvant
A c'hourdrous dre e voes dont da louqua an douar
A quement so ennan ebars en general.

Goude quement-se tout vo guelet rapportet
An tan demeus an env gant Doue digasset,
A devo en eun instant quement a vo voar ar bed
Eb respecti netra en poult vesonti dewet.

En eur memeus instant ar bed universel
A vo de commandet expres gant eun Arc'hel
Dre an drous an drompill donnet da sortian
Demeus o beio evit apparissan.

Sortiet deus ar be a quitet an douar,
Savet corfo, a neve, arri eo ar varn general
Ma vo red rentan cont en presans on Chrouer,
Da gonfirmant an arrêt deus ar varn particulier.

Roue an ol Ronane eo a deu da c'hervel
Ar bed antieramant, eb dont da dale pel,
D'e n'em bresanti ol ebars en eun draouien
So hanvet Josapha, eb laquat quen termen.

Evit explican dec'h an het ac al lec'h et
So en draouien-man, Josaphat eo hanvet,
Pemp cant pas het, tri c'hant al ledander
So bars en draouien-man, ar scritur a vere scler

Ebars en draouien-man e weler a hirie
Ar forme eur gador wen, ellerc'h guesal
Roet enni ar setans da vean condawnet
Voar vene Golgota e vae expedit.

Ar maro a deu breman ba bresanti sevel
Trubuillet gant esclam, o clevet mæs an Ael
Pini a vo clevet dre'r bed antieramant.
Bete peuns an ifern bras, en creis an tourmant,

Eur brut an terruplan pini a lar dime
Dont da n'em unissan breman gand ma Doue.
En despet did eo ret donnet da sortian
Crenan a ran gand eston o tont d'apparissant.

Dirac an daoulagad deus a Varner ar bed,
Ar mor ac an douar ol en neus ing formet
An oll astro en er, ar stéret ac a loar,
An eol er firmamant, ol e main en glac'har.

Ar mor en eun instant a rento ar c'horfo,
A zo enni beuset, tout en o c'hassamblo.
Ac an douer ive quement so interret
Ennan, abaoe ma seo gant eun Doue croet.

Evit o assemblu en draouinen Josaphat,
Tud santel, pec'herrien a tud a bed sort stat,
Da c'hortos ar Barner pa zisquen deus an env
Da jugi pep ini herve stad e vue.

O Doue ! ma breudeur, heman vo eun devoes
Ma comprenfemp ennan nin na bech'femp james
O voelet separi an eil deus eguile
Gant eun Ael tout expres dre ordrenans Doue.

En tu deo a vo laquet ar c'horfo triomphant,
Brillantoc'h vit an eol gant e air eclatant,
A neuse en tu clei e vo ar pec'herrien
Tefaloc'h evit an nos gant e sefaligen.

Hennes vo ma breudeur, ar separation
A laquaï ar pec'her en desolation,
Mantret gant ar glac'har o voelet o deus bet
Grasso digant Doue ac e nens negliget.

Malheur dimp, e meze chetu ni er voes-man,
Arri eo termen n'ellomp mui resistan
Ma veomp condavnet het an eternite
Dar flamo devorond gant guir vab eun Doue.

Chetu ar re a moamp evite meprisans
En tu deo laquet ebars en assuranc,
N'in, o fiout re er bed oa en e vanite
O caet re a estim vit ar mondanite,

Maneio deus ar bed deut d'en em digueri.
Gareet quet varnomp vit on assomi
A te, maro grevus, deut don aneantissa,
D'on laquat en ludu ma c'hefomp da netra.

Neuse e tisquenno ar Barner deus an env,
Ac e accompagnet gant eun nombr a Aele,
A Saent, a Senteset, Prophetet, Ebelst,
Sperejo evurus a nombr a dud santel.

Avizet c'hristenien, sellet deus ar pentur
Ar poltret a Jésus. Salver Redemptur,
O tisquen deus an env er bed voar eur goabren
Evit donet da varn an oll universel.

Chetu, ma breudeur, ar boquet agréabl
Am boa hirrie an de, da laquat dirac o taoulagad
Me o ped gant humilité da donet d'en compren
En anno Jesus-Christ, ar Barner souveren.

Ol fleurieu ar bed deus an douar a sev,
Mæs homan, ma Breudeur, a deu demeus a nev
Rac se me a c'houlén, pa oc'h en o sitans,
A c'hui so preparet, a pur a gonsians,

Evit dont da reserv eur boquet quen divin,
Pa jonjomp neubeutan on boan evit fin,
Pa zeuto ar maro er fin deus on bue,
Rac entre e saon dorn rentfomp hon ine.

Rac se compagnones, me deu do suplian
Da regli o bue en queit a ma veet voar ar bed-man :
Ar maro so subtil ac a dosta bepret
A soupren cals a dut ac a ve en yec'h et.

Men deu do conjuri en anno ar guir Doue,
Dont da laquat urs vat ebars en o c'hine,
Rac ar Varn General na rei nemet confirmant
An aret a recefomp en on eur diveza

Me gare caët eur voes a ve quen eclatant
Mc c'halse clevet partout dre ar firmamant
Men a avertisse ar bobl ebars en general
Da netaat o c'honsians aben an de final.

Jeremy ar Prophet guejal a lamentet
Voar guer Jerusalem a partout en Jude
Pa voelet dorn a coler demeus an Eternel
Prest do reduisan, do laquat en miser.

Men a ra dec'h ive ar memeus avertisamant
Da n'em brepari ol voar ben ar jugamant
Ma c'helfomp gant fians dont da apparissan
A neuse en tu deo donnet de n'em blissan.

Breman me a expliqo dec'h vel ma eo marquet scler
Gant an tado santel el lezen ancien
Ar setans redoutabl a vezo prononcet
Gand Mab an Eternel ebars er fin ar bed

Evel ma vo ar Barner aseet vo guelet scleramant
Ar pec'hejo cuset, neuse memeusamant,
E vezo gant rigueur venget deus aneze,
Ep respecti nicun, men a bromet dec'h se.

Pep hini a renquo en de-se perillus
Respont a renta con en presans on Jesus,
Produet vo ar grasso a juget pep hini
D'ar joa pe d'ar flamo het an eternite.

Poeset vo a c'hrimou en rigueur ar justis.
Examinet ar foto, mesuret ar valis,
Trempant rei e goler en goad ar pec'herrien.
Se a rei de lisqui bars an tan an ifern.

Ar monstr bras Lucifer, souveran an ifern,
N'en bresanto eno a gantan e gac'hier,
Pini a rento preuv a guement a neus groet
Enepe an decq gourhemen a so dimp commandet

Chetu ase ma c'hac'hier, Barner a virione ;
Examinet breman ar stad deus e vue
Ne c'houlennan netra ma neneus din gleet
Autro o couir dec'h, ma hini dre droet.

O Jesus, ma breudeur, pebeus devez redoutet !
Guelet an Æle memeus, tout int spouronet
Ac an ini so en ifern ar muia sur et
Dirac ar Barner bras a deuio da bresec.

Ar Voerc'hes gloriüs a beniguet meurbet
A vo enno neuse ac e daou dorn juntet.
A hi prest da glevet rei ar setans divezan
Da ol ligne Adam comprenet d'o pedan.

Da guentan ar Barner gant eur vijag joaus,
O tistrei en tu deo eus ar re evurus,
Dre gomzo familier deze a lavaro :
Deut, tud biniguet, deut gane d'an envo.

C'houi so bet en o pue guir jervigerien vad,
Queit a ma voac'h er bed, dime a dam Zat
Evit ho recompans e veet curunet
Breman ebars er gloar, en pales an Drindet.

En andret ar bevien c'houi so bet charitabl,
Roet d'e an aluson demeus ar galon vad,
Ous o noan o posa bet roet de da zibri,
A roet de dillet vit en em soulagi.

O tistrei en tu clei e parlant evellen :
Herve rapport ar scriturios al lesen ancien
Me zo a neve deus an ev disquennet,
Souffret poan evidoc'h ma vijac'h bet salvet.

Souffret em boa ive maro a bassion,
Exposet en eur groas da bean or ranson ;
Ma vijac'h bet fidel da heuil ma gourc'hemen
E vijac'h curunet en ev evit biquen,

Roet em boa en toës ma Fredicatoret,
Covesourio santel a ma guir vignonet,
Da gaet an absolver demeus ho pec'hejo.
Pa deujac'h do haet gant queun en o calono.

Touer, blasfematur deus ma c'hano santel,
En durant da vue, den barbar a cruel,
A te o c'hout eun de a c'harige
E renkies rent-n cont e presans eun Doue.

Transgresset e teus ma oll gourc'hemenno
O tont da vomissa dre goler blasfemmo.
Ouspen e c'hout bet c'hoas guel exemples pue,
O sacri malojo dirac tud da gontre.

Usulier miliguet, pelec'h e man ar gaj-se
Deus ar mado as poa bet, lavar breman dime ?
Den lach, den yen deus a galon en andret ar bevien
O tont da rapinet digante o moyen.

Men so bet e ty alies quen affliget
En personneg eur paour o clasq ma samiq boet.
Te teus bet ar galon da dont d'am refusi :
Deus da anaout breman me deu de n'em venji.

Tud pinvidic, me o ped, sonjet en quemen-man ;
En silans eus Doue, de ar Varn divezan,
Enepe an tud ingrat ac an usullerien
A refus o madou da souten ar bevien.

Den lubric miliguet, ren din brema cont,
Gant da actiono te voa buon a prompt,
Da glasq ar plasso secret da dont da gometti
Heuil da bassion vil evit dont da bec'hi.

Te a jonge dide den ne vouige biquen
Netra a guement-se deus an nep a voa o ren,
Mes breman ar bed ol a voel da bec'hejo,
Evit da recompens te souffro ar poaniou.

Den gourmand obstinet, te garie ar cheriou mad
Pillier hosteleri, a te o c'hout er fat
Penos ar gourmandis a voa eur pec'het marvel
A vije punisset dre poaniou cruel.

Bars an hosteleri eno e voa da blas,
o tibri, o c'hefa, memeus an deio bras,
Pere a moa consacret evit ma servigi :
Te deus ing impliet evit dont da bec'hi,

Mes arri eo an de na elles mui tec'hel :
Men venjo ac'hanout, breman, den criminel,
Elec'h da cherio mat te po naon a ser het,
Te a souffro poaniou a vezo diremet.

Tud lach a diegus da dont d'am serviji,
A herxe ma lezen manquet da n'em regli,
Da c'heuil an offiço pere m'oa commandet ;
Guel voa ganit c'heuil an danso miliguet.

Tud yaouanq, me o pet, sonjet en quemen-man
C'hui gar an ebato, eno man o c'holl joa ;
C'heuillet a gouspero ive an ofern bret,
Lest an assamblec pere so difennet.

Rac profani ar sul consacret da Doue.
Unan ar seis pec'het marvel eo ar re-ze ;
En de-se, de ar Varn, e veet condavnet ;
Evit souffro ar poaniou a vezo diremet.

Ar seis pec'hed marvel ar ze eo ar pinno
Pere a gas an dud dreize an ifernio.
Rac-se mo supplian balamour da Doue.
Da ober pinijen a chanj deus a vue.

Goude a reproch-man gret gant guir Doue
A eneb ar bec'herrien, e prononso goude
Ar setans redoutabl gant eun er golerus ;
Pelled divoui-me breman, c'hui ol dud malurus.

AR BEC'HERRIEN

Pellec'h eta, Barner, o vesom exilet
Dre an arret o c'heus n'on enet prononcet :
En pes corn deus ar bed e vezo oa prison.
I'an dec'hui o gommant dim-ni, Barner guirion ?

DOUE.

O prison a vezo en creis fons ar douar,
En eur plas na voelfet nac ar eol nac al loar,
A n'o pezo eno a neb sort sclerigen
Nemert an nos antier, leun a defaligen.

AR BEC'HERRIEN

Pe sort poan a souffrom eno ta ma Doue,
Pa omb forbaniset dirac o majeste ?

Tec'hel deus o presans a so dim eur boan vras
A bean exilet a dirac demeus o pisach.

DOUE.

Ar poaniou a souffret n'o pezo quen partach
An tan deus an ifern a vo ho heritach ;
Ar mel en o c'hesquern a deuio da vervoui,
Gant ar rigueur deus an tan o tonnet d'o devoui.
A n'o pezo enne quen boet na quen breuvaj
Nemert naon a zec'het en creis ar poanio bras,
Gant an ampretanet sourdet a touseget,
Gant erret furius en tan se devoret.

AR BEC'HERRIEN

Mes, Barner souveren p'an de ret dimp soufr poan,
Dre eur setans prononcet devoui ebars an tan ;
Da vianna eta na vezo fin ebet
Goude eur nombr blavejo er poaniou diremet

DOUE.

Nan, biquen na finisso o poan nac o c'hanquen.
Entre vo tri ferson hag eun Doue o ren ;
Eternel a vezo o poan ac o tourmant
A viquen a chompfet en tan-se languissant,

AR BEC'HERRIEN

Penos eta, Barner, chom biquen da lisquin
En creis a tan ardant hep dont da gonsommi !
Dre ar rigueur deus an tan c'hellomp bean devoet.
Hep dale pel amzer bars en ludu rentet.

DOUE.

Biquen na gonsomfet hed an eternite.
Bopret veet en o pes o souffr ar poaniou-se,
Chom a refet antier en tan-se languissant,
Hep ma teui da verrat eur momet o tourmant,
Pebeus eston a cri na onfe den compren
A rei an ineo a ielo dan ifern,
O laret adieu d'ar Voerc'hes a de Mab,
Cri e vo ar galon ma na deu da dristat.

AR BEC'HERRIEN

Adieu eta, Jesus, gant eur voes lamentabl !
Adieu ta evit biquen n'en oc'h pelloc'h on Tad
Dre an arret o c'heus n'on eneb prononcet,
Adieu ta evit biquen, ret vo bean davnet.

Adieu, Guerc'hes Vari, Rouanes deuz ar gloar,
Adieu, ni reqq monet da gomans on glac'har !
C'hui a voa evidomp bobred avocades
Ma vijemp bed fidel d'o pedi Rouannes.

Adieu dec'h, oll Sent demeus ar barados,
C'hui ya breman dar gloar, da pales a repos
A nin na momp biquen nemert poanio sanglant
Hep caet eur momet deus ar soulajamant

Adieu dec'h tensor car deusar gloar eternal
Nin on eus o collet dre ar pec'het marvel ;
Malheur dimp-ni biscoas ma voamp ni deut er bet
Pa eo ret dimp disquen en ifern diremet.

Chetu aze ar portret deus ar Varn divezan,
Arrio eun de pa sonjomp nebeutan ;
Na eller quet doeti anez renons d'ar feis
Pa eo guir eo laret dre hano eun Doue.

Jesus, Roue ar gloar, c'hui va tad ar Barner ;
Nin o ped da rei dimp grasso particulier :
Da chanch deus a vue quent mont divoar a bed
A da ober pinijen demeus on oll pec'het

Guerc'hes glorius Vari, Rouanes an Ales,
Nin o ped da sellet ouzomp deus a druez ;
Bed evidomp bopred avocades fidel,
Procuret ma c'hesomp d'ar joaio eternal,

O Sent, Senteset, mignonet da Zoue,
Intercedet evidomp dirac e vajeste,
Evit ma momp ar c'hras enn de da nem voelet
Ebars er barados, en pales au Drindet.

Adieu compagnones, me deu da c'houl iscus.
Diganec'h assemble ha digant va Jesus.
O requeti dimp ol demeus a galon vad
Ma veomp en tu deo en troien Josaphat.

Briviquen, me assur, an avantac'h non bo.
Da nem gaet assemble qu'en a vezo enno ;
Adieu a lara dec'h, dre eur guir garante
Men a souet dec'h ol ar peoc'h a beurs Doue,

Ar peoc'h, an union, hennes eo ar fleuren
So ral en amzer ma en mesq ar Gristenien
Nemet leo doue a distractiono ;
Lec'h ma queref, en quer, er paroujo,

An distraction ar guel deod miliguet.
A laqua desunion partout e bars ar bet
Dre ma ze eun arm bulamus en ifern blerumet,
D'e disquen a bejo on Salver biniguet.

Couscoude ma breudeur, ma raemp reflexion
Voar an dec gourc'hemen a roas Roue an tron
Dar prophet Moïsas voar diou dolen ven taillet,
Ebars en tentur aour hi a oa rapportet.

Ar gentan taolen a gommant caret Roue ar gloar
Dreis gement tra a so crouet voar an douar,
An eil a gommant dim ol e n'en garet
Pa omp dre memeus goad gant Doue unisset.

Mes en plas ar modesti gant Satan so laquet
Evit decora coms al leon miliguet,
Evel ar faltesto a enep or Salver
Eus an accus guejal dirac Pilat Barner.

M'en deu da laret d'ec'h evel sant lan Badezour
O coms deus faltesto Herodes den traitour ;
Lingam andeam am Judea Dominus
Telet plai, Cristenien, rac ar Barner so juste.

Alas ! ma breudeur ques, mar quaramp ni compren
On bue er bed-ma ne nemet eun tremenaden,
O sonjal alies bars an eternite,
Pehini a badou entre ma vo Doue.

Diou eternite so unan so vertuos
Ac e so preparat vit ar re evurus,
Pere e devo heuillet an Avel,
O tont da pratican or vutuio santel

Allas ! eun al so glac'harus da gompren,
Bean da viquen davnet en crei pus an ifern,
Sonjet en se bemde, liessan ma c'helfet ;
Tourmant so en eur plas, en eun al joaustet

Divoar an teat-man me deu da remerqui
An dud a bep quartier deus en em assemble,
Evit retorn na han pe hini d'en gontre ;
Doue d'ho conduo bopret dan hent an ev.

Evit pa veomp er pors a salutation,
O possedi on heritach en pales Roue an Tron,
Ma torfom on sec het er feuntun ar vue
A desiran dimp ol dre eur guir garante.

Da bep tra tout so fin nemert da c'hras Doue,
Rac-se, compagnones, meu guemer ma c'honge,
O soueti dimp ol ar gloar selestiel,
En anno an Tad, ar Mab, ac ar Speret-Santel.